

Disparti
Etre d'aveu zen yaouanq a baros Plougonver.

(371, suite)

Var ton:

Tavit, calonou sansipl, selaouit gant silanq
Ar recit eus va glac'har : trista experianq !
Ar Fortun, e, he c'holer, demeus va curustet
Dre goal mouvamant he rôd e deveus va stünqet.

(372)

Tao eta, va c'halonic, izella da glemmou ;
Ro liberte d'am speret da zespeign va foanniou :
C'houi ive, va daoulagad, brema n'em dizec'het,
Va quenou na ell mui comz ; re oc'h eus-an tromplet.
C'houi, va oll faculteou, ho moderation,
Evit m'allin quell prononq va quir affliction.

M'em boa choaset gant respet vit objet v'amitie,
Ur grouadurez yaouanq a voa deus va c'hontre :
Bet meus bepret evit quir amour, quir respet,
Ha demeus e feurs ive ouy bet fell enoret.

O amzer a blizadur, te zo ta tremenet !
Consolation, esperanq, eridon oc'h collet !
Allas ! trista chencharmant a eprouvan brema !
Courach, courach, calon baour, pe zes da beur-ranna.

(373)

Cunduet hor boamp yaouanqis gant honor ha prudanq,
Bepret fidel d'ar vertuz, bevet en inoanq ;
Mes o clasq dont da renta parfetc'h hor bonheur,
Hor boamp troublet hor spered, fabriqet hor maleur.

Hon diou galoni a voa a bell vras unisset,
Hac hon daou zorn a zonzemp a vije bet erret ;
Anfin, d'em em quemeret voamp deja qazi prest,
Pa gollis, evel Adam, ar Barrados terrestre.

N'hor boamp get bet, evit quir, eveltân tânveet
 Eus ar vezeñ a vuez, ar frouezen difennet ;
 Mes santimanchou barbar demeus va oll querent
 A eure, dre va febles, din-me quittât va hent.
 Hac elec'h tout unisset, d'am quir bried Eva,
 E voen outi separet, casset d'ar vro bella.

(374)
 M'ho les, sperejou parfet, bremâ oll da gompren
 Ei ... perz iol curun, pebes goual blaneden !
 Separi diou galonic na rent nemet unan,
 Ha donet d'o difframma : honnes a voa ur boan !

Houmes a voa goucoude ar supplig hac ar groas
 A zupportas va c'halon na pa zispantias
 Demeus calon inoçant va douz, va c'harante,
 Ar kini da behini e rojen va bue.

Entrezo'h-u, tud yaouanq, oc'heus intantion
 Da zont da formi chadenou, gant quir reflexion,
 N'it get d'ey em angagi ; goulennit gant Doue
 M'a plijo ?r choas ho po grêt d'ho tud ha d'ho ligne,
 Pe ho mignonet alfac'h un devez da gavet
 Gazi evel enemi gant glac'har ha regret.

(375)
 Na gretec'h get marterze penos va foan genta
 Ne voa nemet ur squeudic qichen va foan bremâ :
 Ar grouadurez charmant pini a garan c'hoas
 A deu bremâ d'am dilezel, da quemer ouzjin cas :
 Dont a ra d'am repoussi pell demeus he c'hichen,
 Ha da dec'hel diouzin vel pa ven ur vocen.

Ancouët he deus va amitie, ancouët e ar respet,
 Ha pequement va c'halon ey doa he cherisset.
 Sevi ra va daoulagad var ar sacrificou
 A eure din ur galon carguet a c'houlou.

Ancouët e ar bromessa hor boamp - ni grêt hon daou,
 Fidelite in eil d'equile bete fin hon d'eyou ;
 Ancouët he deus ar goal le hor boamp - ni prononcet
 En faç an en, an douar, d'ey em garout bepret ;
 Na var goad sacr hor Talver angaget hon ene,
 Ar c'henta a drahisje d'an diaoul a vije.

338

Ar goad a deu d'en em scuill dre oll va entraillou,
 A zeu da vouga va daelou, d'etoufi va c'homzou;
 Mes va c'halonic tener, mar be ret disparitiou,
 Dirac Doue hac ar bed justic a c'houlennañ.
 Ma na gar pet he c'halon gris distrei eus va hini,
 Me houl pardon ous Doue evidon hac eviti.

(376)

Pardon! pardon, va Jesus! ma meus oc'h offancet,
 Dre 'n nerez eus hon amitie, dre re en em garet;
 Dêc'h e tleyemp, va Jesus, hor brassa carantez;
 Apezit-ta ho coler; ni offr dêc'h hor buerz.
 Ma na deuit da bermeti e vimp ni priejou,
 Accordit, goude 'n maro ho cloar d'hon eneou.

Sess eta, va c'halonic, da vouela, da grial,
 Ancounac'ha da boanniou, laz ennàn ar tân goal,
 Dre nerez ar oll effejou o clasq soulajamant;
 Alas! ar maro hepquen a rai fin d'as tourmant.

Adieu, adieu, va fried, ar urz so precius,
 Er prononç hep ho quelet a zo din angenius;
 Me souhet dêc'h-u, Mari, quir objet va hirvout,
 Yec'het, chanç, prosperité, ha graç Doue demp tout.

(377)

An nep en deus composet ar recit truezus
 A zo ur C'hloarec yaouanq zo fell zo maleurus,
 Hac en eus-i composet vit soulaji e boan,
 Ha pa zeufot d'e glêvet ho pet sonch anezàn;
 Ho perit sonch anezàn n'o pedennou nos-de;
 Graç demp d'en em velet oll bars en eternité.

Me souhet dêc'h, tud yaouanq, yec'het, avantur vad;
 Doue da bellat ouzoc'h n'eveler calonad!
 Profitet eus va exempl, berit furoc'h eguedon,
 Ha commandit-u bepret d'hoc'h d'ho mestres passion.

Va c'halon ya da vancout, n'allàn mui prononci;
 E zàn da dremen va glac'har e qeit ha ma verin.
 Mar ameus offancet den dre va recit brema,
 Excus, pardon, mignonet, eo va c'homz diverza.

fin.

(Vol. III, p. 371-377.)
 20 str. numérotées.